



CANTIC

EN HENOR DAN INTROUN

VARIA TREZIAN.

CHRISTENNIEN devot d'ar Verc'hes

Me ho ped hac ho supli,
Da zont gant laouenediguez
Da glevet coms à Vari;
Hac eus ar faveriou bras
Ara he cals a blaçou santel
Da nep a vezo en he graç
Hac a so dezi fidel.



Didosta pec'heur obstinet,
Carguet a fallagries,
Mar felle dit c'hoas beza salvet,
Deus d'ar feunteun a vues



Cleo parlant eus a Vari
En em ro dezi a galon,
Hac e c'hobteni dreizi,
Eus da grimou, ar pardon.



Ar pec'heurien ar re vrassa,
Dezi en em adresset,
O devez oll gallet beza
Dre he moyen pardounet;
Me a parlant eus ar re
A quita ho fallagries,
A non pas eus a re-ze
A guendalc'h o goal vues.



An dud clàn hac an dud istropi,
An dud vouzar, an dud dall
En nombr bras a verdaidi
Ep coms cals eus ar re all,
Dar Verc'hes en em vouestlet
Evel ma er guellot souden
Ho deus en em recouret
Dre he graç hac he moyen.

Ar brassa eus ar pec'heurien,
Ho tistera servicheur,
A zeu hirio da antrepren
Dont da bublia he grandeur;
Obtenit, guerc'hes Vari,
Ar chraç, digant ho mab Jesus,
Ma c'halin executi
Un dra quen avantachus.



Un dra veulabl eo christenien
Sevel templou dar Verc'hes;
Hi eo hor mestres souveren
Hac hor guir alvocades.
An honor a rëntomp dezi
Ha so raportet da Zoue,
Difil eo deomp hep-hi
Apezi he vajeste.



En templou-ze ne vez nicun
Rebutet gant Verc'hes;
Ra mari eo hor mam gomun
An oll a so dezi nez.

Eno ec'hel pep hini
Prosternet dirac he imaich
En em voueslla dezi
Hac offri dezi he homaich.



Neus nemet ar Verc'hes Vari
Hac a so Mam da Zoue;
Hi eo ar memes hini
A bedeur he pep contre;
Mes a garter e carter
He debes choazet certen plaçou
Eleac'h ma scuill he faveuriou
Ha francoc'h eus e graçou.



Etre cals a blaçou santel,
So d'ar Verc'hes conservet,
Ebars e pares Plouarzel
Eus ur chapel batisset
Gant tud devot ha parfet,
Gueichal en amzer ancien,
Hac a so ganto galvet :
An Intron Varia Trezian.

Er chapel-mâ, evez cavet
Remed ous pep seurt clènvèt ;
Ar re glàn odeus ar yec'het
Hac ar re gam ar querset.
Memes ar vartolodet
Ha gaff eno ar stereden
Ho cass d'ar pors assuret
Dious danger a dious anquen;



Pell a c'han an dud incredul
A douetus var bep tra,
Pere a dro e ridicul
Ar guirionesou brassa ;
Ar garantes mutuel,
So entre Jesus a Mari,
So un desteni fidel
Eus ar c'halloud a nezi.



Mes evit ho persuadi
Eus ar pes a lavaràn
E falve dîn oc'h angagi
Da antren er chapel-màn ;

Hac a bep tu dan auter
A velot cals daulennou
Pere so em faver
Oc'h en alies a destou.



Pep taulen dîn a represant
Gaubar, hac he vatimant
En danger bras, dre en tourmant
Den em goll antieramant;
Ar mor rust a couroucet
Ha seblant dîn ho confonti
Ne deus aparauç ebet
Ec'h alle en em savetei.



Ar c'habiten, an equipaich
Var ar poent d'en em veuzi,
Gant feis, gant fiziau, gant couraich,
En em vouestlont da Vari.
Querquent e teue ar Verc'hes
Da requeti digant Jesus
Ma recourzont ho bues
En eur stad quen dangerus.

Jesus a zeu da exauci
Ar vam a visericord;
Ar Mor a zeu d'en em galmi,
An tourmant da goll efort.
A lestre e meas a zanger,
Couls hac an dud a so enna,
A zeu d'ar gueur eber amser,
Gant an avel an douça.



Mes ur vaich eves disquenet
Eus a lestre, ar c'habiten
E teu, gant e vartolodet,
D'ar chapel a Trezian.
Divoutou a discabel,
Memes var corf ho rochedou;
E teuont d'ar chapel santel
Da execuli ho veuou.



E testeni a gueme-mâ
Peur vuia pep cabiten,
Abars quitât ar chapel-mâ,
A lez enni un daulen.

Eleac'h ma vel pep hini
Ezeo ar Verc'hes o souten
Eus an oll verdaidi
En danger hac en anquen.



Greg paour contristet, affliget,
Ambarquet eo da bryed;
Pell amser se ne c'heus clevet
Aneza menec ebet;
Deus d'ar chapel a Trezian,
Eno e cavi un orach
Pehini a vezo certen
En da andret favorabl.



Sellomp c'hoas ouz ar branellou
'Aso dirac an auteur
Petra int-y? nemet mercou
'A quen alies a faveur,
Hac a quement a graçou
'Accordet dant dud istropi
O deus bet en o foaniou
Recours d'ar Verc'hes Vari.

Ma ranquen dont da raporli
Ar miraclou pen da ben
A ra Jesus e faveur Mari
Er chapel a Trezian,
Eleac'h ur follen paper
E felle din dont da impliga,
E renquen ober eul levr
Memes eus a ra vrasa.



An dradition a zesq deomp
Penaus un den dalc'het
Ebars en Turki er prison
E captivite ar barbaret,
Diaguent ma thie mervel
E oue deza annoncet
Gant ar plac'h en serviche
Evige antornos lazet.



Ar quelou-se-ta pa glevas
Ec'h adres he auresoun
Da Introun Varia Trezian :
O va Mam, o va Introun,

Ur sell a compasion
Var ho servicher fidel,
Ha tennit èn eus he brison
Mar deo ho madeles.



Ebars er memes instant
E oll vemprou sesicet
Hac en eur c'houquet an douça,
He en em gavas plonget.
Anternos vintin oa rentet
Er chapel a Trezian,
Dre buissanç ar Verc'hes,
Diliam a dijaden.




Bras a bian, a nople a parlabl
E caffimp he Trezian
Jesus a Mari favorabl
Da exauci hor peden.
Eno emâ an dour a grace
A rente ar c'horf hac an ene
Tout-a-fet pare a yac'h
Dious pep seurt infirmite

A mar bes nicun ebet
Refuset gant ar Verc'hes
Quemense so ur merc certen
Eus e brassa carantes;
Alies e choulennomp
Traou disagreeabl da Zoue
Hac he refus a c'hanomp
Evit profit hon ene



C'hui a oar cals guel evidomp
Ar pes so deomp necesser;
Deoc'h Jesus en em adressomp
Ha d'ar Verc'hes hor mam guer.
Grit ma zaomp oll da repos
Goude ar fin eus hor bues
D'ar gloar eus ar Barados,
D'ho meuli evit james.

FIN.



LE VEUF


DE LA CHAUMIÈRE.

Sur l'air : Gralon, Roi de l'Armorique.

DE tous les riches d'à présent
Je n'envie pas la richesse;
Je suis un pauvre paysan
Qui vient de perdre sa maîtresse;
La mort me ravit aujourd'hui
La plus aimable ménagère,
Voyez, comme je suis réduit!...
J'ai six enfants dans ma chaumière, (*bis.*)

Lorsque mon épouse vivait,
Je l'adorais pour sa sagesse,
Elle, et puis mes enfants, venaient
Souvent me combler de caresse,
Je les embrassais tour à tour,
Ah! que c'était doux pour un père!...
Par leurs caresses chaque jour,
J'étais heureux dans ma chaumière!.. (*bis.*)

Le matin quand je vais aux champs
Continuer mon labourage,
Je laisse mes pauvres enfants
Gouverner mon petit ménage!
Le soir, quand je rentre chez moi,
Pour me faire oublier leur mère,
Ils viennent tous autour de moi,
Me consoler dans ma chaumière!.. (*bis.*)



INTAON

AL LOCHEN.

Var ton : Gralon, Roue Breis-Izel.

ER bed-mâ nac aour, nac arc'hant
N'o deus biscoas staguet va c'halon,
(N'on nemet eur c'hos paysant
Contant e voan em c'hondition;
Mes va phryed carantezus
A gollan hirio, pebès anquen!
Guelit a n'on quet maleürus....
C'huec'h c'hrouadur am eus em lochen *(bis.)*

D'ar poent ma voa beo va phryed
E furnez a charme va c'halon....
(Va bugale eus va c'haret,
A roe din consolation!
Bep eil oll e poquen deze
Un tad eürussoch na vo biquen!
Dre o gestou tener bemde
E voan eürus ebars em lochen. *(bis.)*

Da vintin pa yan d'ar parcou,
Adare da goumanç va devez,
(E lesàn va bugaligou
Eus va zi da guemeret evez!...
A da nôz pa zeuàn en dro,
Evit va distrei d'eus va anquen
En em stardont oll var va zro
D'am c'honsoli ebars em lochen. *(bis.)*

Je n'éprouvais point de douleurs
Avec ma petite famille;
A présent je verse des pleurs,
Sitôt que j'aperçois ma fille!...
Elle représente à mes yeux
Le portrait de sa tendre mère!...
Et malgré mon malheur affreux
Je suis heureux dans ma chaumière!... (bis.)

Ah! si je pouvais réussir,
A bien élever ma famille!...
Peut-être qu'un jour à venir
Je verrai marier ma fille....
Alors mes garçons seront grands,
Ils pourront labourer la terre,
J'aurais espoir dans mes vieux ans
de vivre heureux dans ma chaumière!... (bis.)

Mais je serais bien plus heureux,
Si je les voyais gagner leur vie,
Et si la mort fermait mes yeux,
En tranchant le fil de ma vie!...
Tous mes amis m'enterront
Quand j'aurai fini ma carrière
Et mes enfants partageront
Mon petit bien et ma chaumière!... (bis.)

Bras voa va laouenedigues
Pa vizen er guer gant va ziad;
Bremâ pa velàn va merc'h guès,
An dour a zeu deus va daoulagad!...
Seblantout à ra din bepret,
Guelet e mam dener em c'hichen!...
En despet d'am c'heus diremet
On c'hoas eürus ebars em lochen. (*bis.*)

Ah! ma c'halfen, ep caout miser,
Sevel a disqui va bugale!...
Me alfe c'hoas gant an amser
Fortunia va merc'hic, martreze...
Neuze va fotret a vo bras,
Capab da labourat un dachen,
Em c'hosni me a allo c'hoas,
Beva eürus ebars em lochen. (*bis.*)

Eürussoc'h c'hoas m'en em gavo
Pa guelin o c'honit o bara,
Neuze pa zeui ar maro
Eus ar vuez-mâ d'am dilivra,
Va mignonet en enterro
Gant va phryed, pe en e c'hichen!...
A va bugale a rano
Va zam tieguez a va lochen!... (*bis.*)

J. P. M. S.

FIN.



E Quemper, cus an Imprimiri E. BLOT, mab.